

# KANNADIG

## JMBOURC'H

Kelaouenn *Emglev An Tiegezhioù* niverenn 64 Genver-C'hwevrer 2010 Priz : 2 €

### Ur Bed e-giz pa vije

*Respont da Françoise Morvan*

Klevet hoc'h eus anv eus Françoise Morvan. Bet ganet e 1958 ez eo ur skrivagnerez c'hallek a reas studioù a zoktorelezh war al lennegezh c'hallek, diwar-benn Armand Robin, ur barzh a orin eus Rostren, evelti, ha diwezhatoc'h war François-Marie Luzel. N'anavezer skrid brezhonek ebet diwar he dorn. A-enep an Emsav he deus skrivet pe graet pennadoù-kaoz e-barzh kazetennoù ha kelaouennoù gallek a bep seurt, evel *l'Humanité*, *Bretagne-Ile de France* (dalc'het gant ar PCF), *L'Express*, *Nouvel Observateur*, *Libération*, *Charlie Hebdo*, *France Inter*, « *L'Observatoire du Communautarisme*<sup>1</sup> », un aozadur a glask stourm ouzh kement tra a denn d'ar "gumuniezhouriezh", hag ivez war ul lec'hienn war ar genrouedad savet ganti hag anvet *Groupe information Bretagne* (GRIB).

Ur flemmskrid a-enep an Emsav he deus skrivet ivez, e stumm ur buhezskrid : « *Le Monde comme si* ». E-barzh e kaver enta anv eus an dizemglev etre Kervarker ha Fañch an Uhel diwar-benn ar Barzhaz Breizh, eus an emsav sevenadurel hag an emsav politikel e Breizh, eus emzalc'h an emsav e-pad ar brezel, eus krouidigezh ar peurunvan, eus Per Denez dreist-

holl hag eus tud all, eus Skol-Uhel ar Vro, eus Diwan, eus Ofis ar Brezhoneg, eus an arc'hant roet d'an embann brezhoneg, eus ar Gwenn-ha-Du, hag un toullad traoù all c'hoazh.

Gant ar *Réseau Voltaire*, kevrenn Roazhon al "*Ligue des Droits de l'Homme*", gant « *La Libre Pensée* » (an aozadur a oa bet o kas en-dro an abadenn evit divadeziñ skolaj Diwan Roparz Hemon) ha gant ar strollad politikel *Parti des Travailleurs* he deus kenlabouret ivez da ziskar brud an Emsav. Sed aze pezh a c'heller lavarout diwar he fenn, evit gouzout ouzh piv hon eus afer. Meur a hini en deus klasket respont dezhi da heul an difreterezh margredik<sup>2</sup>-se eus he ferzh a-enep an Emsav, hogen, na petra, e galleg : Mikael Treger ha Mona Ozouf (merc'h Yann Sohier). Youenn Olier ivez, en deus graet un tamm, peurgent e niv. 6 ha 7 eus ar C'hannadig-mañ.

Er mizioù-mañ em boa lakaet em soñj adlenn an div levrenn en doa skrivet Youenn Olier diwar-benn pezh en deus anvet « Skol Walarn », ha sebezet on bet o lenn tro-lavar holl anavezet Françoise Morvan abalamour d'he levr « *Ar bed 'giz pa vije* » dindan pluenn Youenn Olier e-unan, o skrivañ diwar-benn skrivagnerion Skol Walarn : « *Savet o deus enta ul lennegezh « e-giz pa vije », evit ur bobl ha ne oa ket anezhi c'hoazh, hep derc'hel kont ebet eus ar boblañs evel ma oa, hag hep skrivañ eviti (...), hep derc'hel kont ebet*

<sup>1</sup> An holl ditouroù-mañ a gaver war Wikipedia. Gant ar "*Grand Orient de France*" hag un ezel oberiant anezhañ ar senedour Jean-Luc Mélenchon, e oa bet un diviz e Sened Bro-C'hall d'ar 24 a viz Du 2006, e-lec'h m'he devoa distaget ur brezegenn a-enep Karta Europat ar yezhoù, hag a-enep difennerien ar yezhoù evel Diwan

<sup>2</sup> Margredik : *fanatique* ; ivez « *baranek* ».

*kennebeut eus yezh ar bobl (...). Skrivet o deus a-benn en em galonekaat o-unan er stourm a renet, ha war un dro ivez, evit reiñ un testeni diwar-benn ar stourm-se, dres. E gwir, ne gredan ket e vefe kemmet kalz saviad ar skrivagnerion vrezhonek hiziv an deiz, e-keñver skrivagnerion Skol Walarn (...)* ».

E 1974<sup>3</sup> eo e skrive Youenn Olier kement-se : abaoe ez eo steuziet-mik yoc'h an *terminal speakers* hag ar Vreizh plouezat-kristen o deus anavezet ar re goshañ ac'hanomp. En em gavout a reomp enta en dezerzh, gant ur gevredigezh hollvedelaet « *Mac Donald - Coca-cola* », ar Genrouedad hag ar skinwel e pep ti o lonkañ o amzer d'an dud adalek o oad tenerañ, amzer ebet ken da lenn, breskaet spontus ensavadur an tiegezh gant an hilastaliñ, an diforc'hañ-bugale, an torr-dimeziou hag ar « *Pacs* », an holl draoù diaoulek-se hag a laka an hini gwanañ eus ar c'houlblad da sujañ d'egile e pep doare anez en em zispartiañ...

Da heul Youenn Olier, na nac'homp ket ouzh F. Morvan emaoomp o vevañ en ur bedig-bed « e-giz pa vije » ; ned eo hor Breizh-ni bev nemet en hor speredoù hag en hol levraouegoù dreist-holl. N'emañ ket an tu kreñv ganeomp, ha n'omp nemet arvesterion a-benn ar fin. Gwir eo e c'hell

bezañ touellet an dud nevez-deuet d'an Emsav, pa vezomp laosk ha treitour pa ne lavaromp ket dezho ar wirionez : n'hon eus ket ar gwir d'o lakaat da grediñ e vije c'hoazh en un tu bennak e Breizh ul lec'h, ur gêriadenn pa ne ve ken, e-lec'h e vefe bev-buhezek hor yezh. N'eus ket. Siwazh n'eus ket. Youenn Olier henn lavare abaoe 1945 ha n'eo ket bet selaouet. Ret eo lavarout dezho ez eus tud e Breizh, nebeut, a gred hag a labour hervez o galloud, lakaat ar Vreizh-se da vezañ. Sur n'eo ket gant tud a seurt ganti e teuimp a-benn da lakaat ar bed-se da vezañ. Ur bed gwelloc'h. Da grouiñ penn-da-benn da heul Kervarker, Meven Mordiern, Roparz Hemon ha Youenn Olier. Ur bed nevez a c'houlenn ur yezh nevez, evel-just, evit bezañ ganet. Ha ma n'eo ket ur bed nevez e vo bepred ur bed gwelloc'h eget an hini a zo merket don e istor Bro-C'hall, a zistaolomp-naet : ur bed kreizennet war ur metou parizian-bourc'hiz, dalc'het gant Frank-Mañsoned, ur Vro-C'hall mac'homerez. Setu. Françoise Morvan a zistaol ar pezh he deus karet, ar brezhoneg, ene hor bro pa lavar n'eus ket eus ar brezhoneg unvan, da skouer. Bez ez eus anezhañ, ha n'eus nemetañ a zrest-vevo hag a c'hell lakaat hor Breizh-ni da vezañ. Da zerc'hel un tamm goanag el ledenez-mañ.

## Tepod Gwilhmod.

<sup>3</sup> Istor Hol Lennegezh, levrenn 1, digoradur ; adembannet e 1995.

## Ren an Divalav

Setu hanter-kant vloaz 'zo, pa zizoloe ar c'houer bihan a oa ac'hanon, Breizh, dre ar C'helc'h Keltiek ma kemeren perzh ennañ, ne oa ket hepken an dañsoù breizhek ar sonerezh hengounel, ar gwiskamantou breizhek, ar yezh vrezhonek, a chomen bamet dirazo, bez' e oa ivez an arz keltiek, ha mar c'hoarveze da unan ac'hanomp dont a-benn da dapout, e Kemper da skouer, en ur c'hafedi bennak, ur skritell "Gouelioù Bro-Gernev" treset gant Micheau-Vernez, e oa ar bravañ tra-koun a c'helle degas d'ar gêr, ken brav e kavemp an dresadenn. Evel ma verk an anv-gwan "keltiek" staget outañ ne oa ket breizhek spis-tre an arz-se peogwir e oa en Iwerzhon en doa bleuniet dreist-holl, met un dra keltiek e oa, ha dre se mad boutin an holl Gelted, neuze a c'helle bezañ korvoet gant pep hini en em anavezze evel Kelt. Komprenet e oa bet an traoù evel-se gant arzourion Breizh an etrevrezel p'o devoa, da skouer, krouet luskad "Ar Seizh Breur"

a oa mennet da grouiñ un arz broadel evit Breizh, distag diouzh pezh a veze gourlakaet warnomp gant Paris. Meur a zamani a voe kensellet gant ar Seizh Breur : kizellerezh, tisavouriezh, kinklerezh, livouriezh, sonerezh, arrebbeuri... met fellout a rafe din komz a-ratozh eus ar skeudennaouerezh<sup>4</sup>. Pep levr, pep kelaouenn, pep dastumadenn ag an Emsav, bet embannet er prantad-se a zouge ar merk keltiek-se, d'an nebeutañ war ar goloioù, pezh a roe deoc'h ar c'hoant da zigeriñ al levr, an dastumadenn, ken e oa an dresadenn, ar c'hinkladur, evel ur bedadenn da sevel an ene. Gwelout da skouer *Histoire de Bretagne* gant an Abad H. Poisson, skeudennaouet gant Langleiz, pe *Tristan hag Izold*, skeudennaouet ha skrivet gant Langleiz e-unan, hep ankounac'haat ar skritelloù evit ar gouelioù evel re ar Bleun-Brugou, pe

<sup>4</sup> Skeudennaouerezh : *illustration des livres, des revues...*

skeudennoù-moger (poster) o tiskouez lod sent Breizh ha Keltia.

Kendalc'het he deus an awen geltiek-se betek ar bloavezhioù c'hwegont, peogwir eo gant lizherennoù keltiek kinklet brav-tre e oa golo kentañ dastumadenn *Al Liamm*, da skouer. Ha deuet eo brizh-dispac'h miz Mae 68, ha da heul an tebet spered c'hwegonteizhat a zouge an dud da deurel d'ar blotoù pep tra a oa eus ar bed kozh. Ouzhpenn se, goude miz Mae 68, e felle d'an darn vrasañ eus an dud bezañ a gleiz evit bezañ gant liv an amzer e Paris, ha kement-mañ, an arz keltiek, a oa traoù kozh, da lavarout eo traoù eus an tu dehou, neuze da vezañ distaolet. Prest e oa an dud da zegemer an arz nevez ha ne c'helle dont nemet eus Paris evel-just. Ha petra 'oa an arz nevez-se : "Arz an divalav", pep levr, pep paperenn bruderezh, pep kelaouenn, ken evit ar re vras hag evit ar re vihan a voe skeudennaouet gant tresadennoù tudennoù divalav a-heligentañ.

Broudet on bet da skrivañ ar pennad-mañ pa 'm eus degemeret kartenn hetoù bloaz nevez digant Ofis ar Brezhoneg<sup>5</sup>, e brezidantez hag izili ar c'huzul-merañ. Petra a ziskoueze ar gartenn-se : ur vandennad furlukined orbidus gant o fri hir divalav hag o daoulagad zispourbellet, oc'h en em verniañ en ur c'harr-tan re vihan. Gant toaz-merañ<sup>6</sup> e oa graet karr ha tudennoù, ha bet luc'hskeudennet da c'houde. Kement-mañ a oa moarvat evit skeudennaouiñ al lugan : "*E 2010, deomp gant hent ar brezhoneg*". Netra da zegas da soñj deoc'h e selle ar gartenn-se ouzh Breizh -ruz e oa toennoù an tiez war ribl an hent -, er-maez ar banell ma oa skrivet warni "Bloavezh Mat", hep komz eveljust ne c'hellfed ket bezañ dedennet kalz gant ar brezhoneg en ur heuliañ furlukined ar gartenn. N'ouzon ket ken penaos e oa dik kartennoù hetoù an Ofis evit ar bloavezhioù tremenet, na penaos e oa paperioù bruderezh Ofis ar Brezhoneg betek-henn, hogen m'am bije merzet un nebeut tresadennoù keltiek warno em bije dalc'het soñj.

Daoust hag ez eus un abeg bennak a-berzh Ofis ar Brezhoneg da guzhat pep dave d'un arz keltiek, pezh na vefe nemet un dra natur a-berzh hor bro Vreizh pa ne vez ket kuzhet a-hend-all ez eo hor brezhoneg ur yezh keltiek. An abeg a vefe marteze da gavout er fed maz eo an Ofis ur goulenner skorennoù ouzh un toullad aozadurioù stadel pe ledstadel : kuzulioù departamant, Kuzul Rannvro, kuzulioù kêr... ha ma vez an darn

vrasañ eus an aozadurioù-se renet gant tud eus an tu kleiz, e-lec'h ne vefe ket gwelet mat hevelep mennozhiaed arzel sañset bezañ re hennadelezh<sup>7</sup> evit republikaned c'hall touet. Neuze, ret bale moan evit na risklañ ar chañsoù da dapout ar skorennoù, ret evit d'an Ofis mont en-dro.

A-hend-all, daoust hag ez eus abegoù da zoujañ e vefe diskred war an arz keltiek gant tud eus an tu kleiz. Hervez pezh a c'heller lenn war lec'hiennoù 'zo eus ar genroued, pa vez lakaet ar gerioù "*Seiz Breur*" er c'heflusker-enklask, n'eus arvar ebet. Kavet em eus div lec'hienn dreist-holl : hini "*La libre pensée*", hag a zo boas da skeiñ war an Emsav ; da geñver un diskouezadeg gouestlet da Langleiz e 1999 e Roazhon e vez barnet ganto arz broadel Breizh, a oa mennet Langleiz hag ar Seizh Breur da bennluskañ, da vezañ un "*art totalitaire*" hag al luskad "Seiz Breur" ur vandennad faskourion enepyuzev. War an eil lec'hienn, [www.amnistia.net](http://www.amnistia.net) e kaver an didec'hadus Françoise Morvan<sup>8</sup>, gant he fluenn soubet bepred en drenkenn, o skrivañ tost da vat an hevelep traoù, en ur pennad anvet "*Art national breton et totalitarisme*". En tu all d'an tamalladurioù boas a faskouriezh, a enep-yuzeviezh taolet ouzh ar Seizh Breur, graet evit kregiñ diouzhtu gant spered al lenner, e santer ar rebech pennañ graet ouzh luskad ar Seizh Breur : bezañ bet dezho an hardizhegezh da grouiñ un Arz Broadel evit Breizh, ha n'en dije netra da welout gant pezh a evode<sup>9</sup> diouzh Paris, diouzh Frañs, hogen a liamme Breizh ouzh ar broioù keltiek all, hag a-benn ar fin ouzh ar Bed Keltiek, war un dro gant distagañ anezhi diouzh Bro-C'hall. Ha kement-mañ graet gant mibion troc'herion buzbug, stlejerion rouedoù ha marc'hadourion botoù-koad. Biskoazh kement-all ! Euzhusat torfed, ha na c'helle ket bezañ pardonet !

Evel m'hon eus gouezet derc'hel d'ar yezh peurunvan, daoust d'an tamalloù graet ouzh ar skrivagnerion a sinas an Emglev e 1941, ha Langleiz eus ar Seizh Breur a oa en o zouez, ne welan ket perak ne c'hellfemp ket derc'hel heñvel ouzh an arz keltiek. Forzh penaos, graet e oa outañ an hevelep tamalloù. A-hend-all, en amzerioù-mañ ma vez komzet bemdeiz a amvevad<sup>10</sup>, n'eo ket hor yezh ur gaer a blantenn a c'hell bevañ hec'h-unan penn, eviti hec'h-unan.

<sup>5</sup> Ne bismigan evel-just Ofis ar Brezhoneg nemet war ar poent-se.

<sup>6</sup> Toaz-merañ : *pâte à modeler*

<sup>7</sup> hennadelezh : *identitaire*.

<sup>8</sup> Gwelout pennad T. Gwillhmod, pajenn 1.

<sup>9</sup> Evodañ : *émaner*.

<sup>10</sup> Amvevad : *environnement écologique*.

## Piv eo Gurdjieff ? (1877-1949)

Hiziv an deiz, neb a ra anv eus Gurdjieff ne c'hwit ket war menegiñ ez eo un den "kevrinus", "a vreutaer klaz diwar e benn" ha me oar-me.

Gurdjieff n'eo netra a gement-se-holl evidomp. Neb en deus bet tro da anavezout kelennadurezh speredel ur relijion diskuliet bennak a wel diouzhtu piv eo e gwirionez. An aergelc'h a gevren en-dro d'e anv n'eo nemet ur frouezh eus un anaoudegezh fall a-zivout an ditouroù en-dro dezhañ. An anaoudegezh fall-se ne vez ket naturel dalc'hmat, gwezh e vez krouet a-ratozh gant ar re o deus ur gounid bennak da dennañ diwar ar "c'hevren".

§1. Kelennadurezh Gurdjieff

§2. Eus pelec'h e teu efedoù ar c'h-gurdjieffouriezh.

§3. An arouezioù lakaet war an tu-gin

§4. Piv eo Gurdjieff ?

§5. Ur goulenn direspont

### §1. Kelennadurezh Gurdjieff

Gurdjieff a dremenas dre galz skolioù ringelennek<sup>11</sup>, lod diles, lod aet da fall, hep chom e hini ebet anezho pell a-walc'h evit tizhout ur gounid speredel solut (evel ma lar Bayazid al-Bistami, neb a voutc'h toullañ ur puñs amañ, hag ur puñs all ahont, ne gav netra a-benn ar fin ; neb a doull start en hevelep tachad avat a gav dour e-leizh).

Ne oa ket war-lerc'h gounidoù speredel e oa o klask, forzh penaos ; un den eus e seurt a zo maez ar c'hoari da viken evit gounidoù a seurt-se, hag a oar ez eo. A-walc'h eo bet dezhañ kutuilhañ e pep skol ur c'halvezder, ur ger-stur bennak, stag ouzh tuioù muiañ-diwar-c'horre hag hewelañ ar c'helennadurezhioù ; diwar ar restachoù-se en deus savet ur yoc'had teñval, pounner ha stank, deut da vezañ anavezet dindan an anv "kelennadurezh Gurdjieff". En diavaez eus ar gelennadurezh-se, higennoù evit dedennañ ar re ranell pe fallgontant ; en diabarzh, un heuliad amrinoù<sup>12</sup> ha kudennoù luzietoc'h-luziet, betek tizhout ar beurzeñvalijenn. An amrinoù-se a vez savet diwar arouezioù, lidoù pe kelennadurezhioù speredel diles, kinniget avat hervez un urzh faos a-ratozh, ha war-un-dro gant distresadennoù, disklarded ha touelloù dister da gentañ met brasoc'h-bras. E giz-se, al labour awenet gant an amrinoù-se ne genderc'h morse ar gounid speredel a rankfe reiñ war un hent speredel diles. Den ebet koulz lavaret e-touez ar gefredourion gornogat ne c'hall herzel war ar c'hoant "digejañ an amrin Gurdjieff"; padal, an amrin-se n'eo

ket bet krouet evit bezañ digejet; evit teogañ ha debriñ ar re a gred gallout digejañ anezhañ, ne lavaran ket.

Ar re a studi ar "gelennadurezh"-se hag a heuilh an "hentennoù" awenet ganti a zeu da vezañ arvarek-oc'h-arvarek war bep tra, hag en em sant gwasket-oc'h-gwasket en abeg da se. Touellet gant rakvarn Descartes a ro muioc'h a bouez d'an arvar eget d'an diarvar, e vuzuliont o doubadennoù<sup>13</sup> hervez ment an diaester a santont en-dro d'ur gudenn, kontrol d'an doare hengounelour a c'houlenn d'ar respontoù bezañ anat ha sklerijennus. Tapet ivez gant un doare kemplezh a izelled a vez korvoet ampart gant ar genilourion-gurdjieffouriezh, e echuont dre vuzuliañ sklerijenn ar "gelennadurezh" diouzh ment ar waskadenn taolet ganti war ar bredoù : da lavarout eo e vuzulier gouiziegezh ar "c'helenner" diouzh ar sotoni hag ar mezevellerezh a grou e pennoù an diskibled ; hag ur gwir blijadur-da-c'houzañv a zo en diskibled-se a anzav pegen abafet en em gavont, ha pegen dic'hallus eo dezho kompren ar pezh a zo o c'hoarvezout. "Pebezh sorser souezhus!" emezo. Ar spi gallout mont da sorser ivez un deiz a ra dezho chom dindan gazel-gae ar "c'helennadurezhioù"-se.

Ne welont ket n' eo ar "c'helenner" nemet ur vargodenn etre daouarn ur "c'helenner" diaoulekoc'h c'hoazh, hemañ ivez lorbet gant unan all, hag evel-se c'hoazh en ur gwir "urzhaz war an tu-gin". Ne welont ket eo touellus keal ar c'h-"kavadenniñ un dra n'oa bet biskoazh gouezet a-raok", a zisparti anezho muioc'h-mui diouzh ar wirionez hollvedel *quod omnibus, quod semper, quod ubique credita est* hag a vac'h anezho en hiniennouriezh. Betek kalz re e kemeront ar pleg santout an diaested e pep kudenn, betek ar poent ma seblant diasur dezho ar wirionezennoù boutinañ hag anatañ. Er penn-kentañ e tenn kement-mañ d'un dieubidigezh eus mac'hom ar rakvarnoù bourc'hiz, met e gwirionez e teu ar studierion d'en em soñjal evel dic'houest da anavezout forzh petra e vefe, zoken o hennadelezh bersonel pe al liammoù o deus gant an dud nesañ dezho. Kontrol-mik eo ar stad-spered-se d'ar gwir trec'h speredel a aotre da unan gwelout e pep tra lizherennoù pe gerioù ar "brezegenn anat" skignet gant Doue d'an holl. Padal, neb a zegouezh er stad gurdjieffek-se a dap lorc'hentez diwar se hag a sell ouzh ar re n'emaint ket en hevelep stad evel "paganed". Diwezhatoc'h en o emdroadur e kav dezho ez eus dogmennoù dic'houzañvadus eus ar c'hredennoù e vez dozvet vioù gant ar yer, e vez gleb an dour pe e vez gwelet gant an daoulagad. Ha pa ne c'hall mui daou ha daou bezañ pevar evito, prest int da dremen a ziskibl da genilour-gurdjieffouriezh d'o zro.

<sup>11</sup> Ringelennek : *ésotérique*.

<sup>12</sup> Amrin : *énigme*.

<sup>13</sup> o doubadennoù : *leurs progrès* (ger gwenedek).

## §2. Eus pelec'h e teu efedoù ar c'h-gurdjiefouriezh.

Ar c'hurdjiefouriezh a dorr a-ratozh ar c'henglot naturel etre luskou ar c'halloudezhioù-anavezout ; ar ringelennadurezhioù diles a glask er c'hontrol derc'hel ha kreñvaat ar c'henglot-se. Ar ringelennadurezh<sup>14</sup> vuslimat a ra anv eus seizh galloudezh vredel diazez, pep hini anezho o klotañ gant ur blanedenn e kenstrollad an heol, kompren a reer neuze e klot pep hini anezho gant ur c'helc'hiad kosmek resis. Da bep kelc'hiad e badelezh piaouel (28 bloaz evit Sadorn, 12 evit Yaou, 28 deiz evit al loar, hag all) ; da bep galloudezh he zizh piaouel ivez, ar pezh na vir ket ouzh an holl c'halloudezhioù a vont en-dro a-gevret. Ar c'henglot-se a c'hall bezañ peogwir ez eus kevatalennoù etre ar c'helc'hiadoù disheñvel ; gallout a rafed lavarout ez int rannet ingal. Da skouer, al loar a dreuz e 28 devezh an hevelep hent a vez treuzet gant Sadorn e 28 bloavezh : tremen a reont dre hevelep arouezioù ar Zodiak.

Damheñvel an traoù evit galloudezhioù bred mabden. Hervez an aroueziezh hengounel, an Heol a glot gant ar c'halloudezh pennañ, ar speredegzh c'hlan, Merc'her a glot gant ar c'halloudezh-prezegañ, Gwener a glot gant an dec'hmeg<sup>15</sup> hag an eñvor, hag all. Eus sellboent an dud war an douar eo tebet fiñverezh an heol a aotre da unan diforc'hañ tachadoù disheñvel an oabl ; memes mod, ar speredegzh eo an hini a aotre da unan gwelout an diforc'hioù hag al liammoù etre ar galloudezhioù disheñvel.

Ar c'henglot peurvat etre an holl c'halloudezhioù a c'hoarvez pa vezont tolpet ha buket davet ur pal unan, evel an holl blanedennoù o treiñ en-dro da ahel an heol. An degouezh kontrol, an digenglot, a c'hoarvez pa vez gouvennet betek re galloudezhioù 'zo, ne c'halla mui neuze an holl c'halloudezhioù kenlabourat etrezo. Diaes d'an dud tizhet gant an digenglot-se, aroueziañ dre an dec'hmeg ar pezh o deus komprenet dre brezegerezh da skouer ; pe displegañ dre ur brezegenn ar pezh o deus desket dre zec'hmeg, pe c'hoazh lakaat ar pezh o deus komprenet dre ar poell hag an dec'hmeg da dreiñ d'un ober fetis, d'un disentez bennak.

Reizh ha boutin eo, a-hend-all, kaout an digenglot-se en hor buhez pemdeziek, ha gallout a reer argas anezhi pe gant ur striv eus ar youl, pe gant ur sikour ouzhpenn degaset d'ur c'halloudezh (da skouer e c'hall un arouez skeudennet sikour gant an dec'hmeg da euvriñ ur c'heal difetis ; ul louzaouenn omeopatek a c'hall sikour gant an dec'hmeg da gavout an arouezioù he deus ezhomm anezho, horjellañ ar c'horf ez-luskidik a c'hall sikour unan da lakaat ur soñj da dreiñ da zisentez, hag all).

<sup>14</sup> Ringelennadurezh : *ésotérisme*.

<sup>15</sup> Dec'hmeg : *imagination*.

Bewech ma tesker un dra nevez e ranker tremen dre un digenglot berrbad, difaziet diouzhtu war-lerc'h gant ur c'henglot brasoc'h en ul live uheloc'h. Ar varregezh da zeskiñ a c'hall bezañ kresket a-galz dre voazañ an dud ouzh gouzañv digenglotoù brasoc'h. Er marevezhioù a c'houzañvidigezh e-giz-se a vez harpet ar studier gant an deskadurezh bet tapet dija, ar feiz hag an esperañs. Digollet e vez neuze ar striv brasoc'h pe hiroc'h gant un anaoudegezh donoc'h pe suroc'h. *Crede ut intellegas ; intellige ut credas* : krediñ evit gallout kompren ha kompren evit gallout krediñ.

An argerzh-se a c'hall bezañ allekaet penn-da-benn avat, ha d'ar poent-mañ e teu ar gurdjiefouriezh war al leurenn ; krouiñ diouzh un tu un heuliad digenglotoù brasoc'h-bras ha diouzh un tu all paliou diaesoc'h-diaes, nemet ne vez tizhet morse hini eus ar paliou ; gant brizh-digolloù e vrouder ar studier da glask dalc'hmat un digenglot nevez, ur pal nevez, hep biskoazh trec'hañ an digenglot a-raok.

Evel m'hon eus displeget kent, an digenglot a c'hall bezañ kenderc'het dre vroudañ betek re ar galloudezhioù izelañ (ar re a vez ar startañ dezho kenlabourat gant ar galloudezhioù all, evel ar santimantoù pe ar pemp skiant) pe c'hoazh dre reiñ gouvennoù<sup>16</sup> dislavarus a-ratozh da ziv c'halloudezh disheñvel.

Ne zisplegimp ket dre ar munud amañ an hentennoù arveret gant skol Gurdjiefv evit kenderc'hañ digenglotoù, peogwir int anavezet-mat dija (ha kinniget evel tebet tuiou da dizhout stadoù speredel uhel, na petra). Studioù bet graet nevez'zo a ziskouez penaos kalz skarennoù a hiziv (n'int nemet astennadennoù poblek d'ar c'hurdjiefouriezh) a ra gant ar wirionez hag ar gaou a-bep-eil a-ratozh evit krouiñ meskaj ha sujidigezh en o diskibled. En ugentvet kantved e voe Gurdjiefv krouer-meur an holl galvezderioù-se. Em envel a rae *The Herald of the Coming Good*, "kannad ar mad da zont", ar pezh a ziskouez e ouie en a-raok diouzh aloubidigezh an douar patatez-mañ gant bosenn ar skarennoù Moon, Rajneesh, ha me oar-me.

Evit reiñ ur skouerenn nemetken, aes meizañ peseurt digenglot a c'haller krouiñ pa c'houlenner ouzh unan bennak skriv gant an treid ur skeudenn ventoniel diazezet war an heuliad  $2 \times 1 = 6, 2 \times 2 = 12, 2 \times 3 = 22$ , ha war un dro dibunañ a vouezh uhel an heuliad  $2 \times 2 = 1, 4 \times 4 = 13, 5 \times 5 = 28$ ; pe pa c'hourc'hemenner d'unan bennak kas ur wezenn-bin tev d'an traoñ a-daolioù loa-gafe ha war un dro kinklañ ur barzhoneg hag adlavarout diehan ur *mantra*. Evel-se eo doare poelladennoù Gurdjiefv, ha dedennañ a reont kalz a dud evit daou abeg dreist-holl : da gentañ eo start krediñ er fed gwir ez int bet krouet a-ratozh evit degouezhout biken d'un diwezh evurus, ha da eil ez int ezlec'hiet diehan gant poelladennoù iskisoc'h ha

<sup>16</sup> Gouvenn : *sollicitation*.

souezhusoc'h. Barregezh pouezusañ an genilourion gurdjieffouriezh a zo kemm poelladenn rik pa vez ar studier war-nes dilezel hag anzav ne gompren netra. Diwar se e vez krouet ur stad a c'hoantegezh-beurbadel na vez torret morse dezhi : an naon broudet diehan a dro da lezvagadurezh. Gurdjieff e-unan a lavare e ranker derc'hel an diskibled "war vordenn an tarzh nervus". An tremen dalc'hmat d'ul live uheloc'h a ziaester hag a luziegezh a vez displeget evel ur bignidigezh en urzhaz ringelennek, hag ar blijadur roet e-giz-se da lorc'hentez an diskibl a gempouez ar vezhekadenn gouzañvet gant e spered ha gant e youl.

Kompren a reer neuze penaos e c'hall an diskibled-se krediñ perc'hennañ "kevrinoù" ramzel war un dro mar diskouezont arouezioù sklaeroc'h-sklaer a gouezhidigezh speredel, a dizh live ar sotoni en degouezhioù taerañ. Ur gemparzhted<sup>17</sup> heverk a zo amañ etre an hentoù speredel diles, a ra d'an hollved bezañ treuzwelus hag anat, hag hent Gurdjieff a lak da greskiñ en diskibled ur merzad a "gevrinelezh", a garantez ouzh ar c'hevriñoù evito e-unan. N'o deus dizoloet kevrin ebet : er c'hontrol, *ar pezh a oa anat d'an holl a zo troet da gevrin evito*. A-fed gweledigezh speredel, ar sent pe ar gevrinourion a zo keñveriadus da erered hag ar c'hurdjieffiz da struskañvaled.

War un dro gant ar argerzhad-se ez eus ur merzad ("kuzh" ivez) a zic'halloud hag a zarsav (dreist-holl a-enep d'ar poell didro barrek d'en em ezteurel sklaer), ha diwar ar merzad-se e teu an nerzh trivial a souezh an dud all alies, hag a vez kemeret dre fazi evel arouez ur "vuhez diabarzh start".

Berr-ha-berr neuze, Gurdjieff a ra d'an aour treiñ da blom. Gwelloc'h eget unan dall o heñchañ tud dall, e oar ober d'an dallentez em ledañ.

### §3. An arouezioù lakaet war an tu gin

N'omp ket souezhet gant an alkimiezh-war-an-tu-gin-se : kalz a arouezioù hengounel all a vez eilpennet gant Gurdjieff. En e oberenn skrivet, da skouer, Hussein (anv niz ar Profed Muhammad, saver an Islam hag ivez *a fortiori* ar ringelennadurezh vuslimat) a dro da anv niz Belzebud ; Judaz Iskariot a dro da "brasañ sant ar gristeniezh"; mab-den a dro d'ur "c'horf a c'han hep ene" (na c'hall neuze tapout unan nemet gant poelladennoù gurdjieffouriezh hag ivez gant un tammig mat a arc'hant, na petra), tra ma vez unvan an hengounioù o lavarout eo an ene a-raok ar c'horf a-fed poelloniezh pe boudoniezh, hag all.

Lakaat pep tra war e du gin a zo labour-natur an "Enebour" (latin *ad-versus* = "dre an tu all", arabeg *Shaytan*, a vez troet "Satanaz" peurliesañ). Kement-mañ n'eo ket lavarout e vefe Gurdjieff Satanaz ; ur satanour n'eo ken. Ur brouenn eus ar fed n'eo ket Paol

Korneg end-eeun a zo en anv a v-Belzebud en deus roet dezhañ e-unan ; Belzebud an hini a c'hourbann bezañ un eilvet Doue.

An ankounac'haat eo a ya d'ober e debet deskadurezh ; n'eo ket souezhus neuze eo ar wanded a ya d'ober e debet nerzh. E *handblezoin* mil anavezet (ul lanv soutil "energiezh" a rae d'e ziskibled estlammañ outañ ha bezañ levezonet don gantañ) n'eo e gwirionez nemet efed fizikel hag hewel un doare arbennik a grign-bev a zo hec'h orin en digenglot bevoniel diehan. Holl izili ar c'horf a vez tizhet gant ar c'hleñved-se (e kelanwel<sup>18</sup> Gurdjieff ne voe ket kavet an disterañ organ na vefe ket peurvrein ; kontrol-heverk eo kement-se da zilizaduster<sup>19</sup> korfoù ar sent) ha ken kreñv eo e efed, ken e ra d'an dud tost santout diaezamant ha yenadennoù hep kompren perak (ar c'hazetenner brudet Rom Landau en deus dazlivet resis ar santadennoù hek-se, bevet gantañ e-pad ur gejadenn gant Gurdjieff). Pa vefe lavaret d'an dud war-nes kejañ gant Gurdjieff ez eus un den klañv-bras anezhañ, morse ne zeufe d'o soñj displegañ ar santadennoù-se evel prouennoù a c'h-"galloud speredel" ; ma 'z eus ur "galloud" bennak en degouezh-mañ, eo hañval ouzh galloud ar re lovret pe klañv gant an dorzhellegezh.

Ouzhpenn ur c'hleñved ez eus ag ar stad-se ; kenderc'het eo gant ul labour resis a zo e bal ar galloud lakaat an dud a ziwad-dro d'en em gavout diaes; troioù-fizik diniver all a zo diazezet war ar galloud-se. Ar c'halvezder evit tizhout ar pal-se, mil anavezet ha disgwiriet mil gwezh gant an holl relijionoù, a zo un heuliad gwalladennoù aketus ha brasoc'h-bras d'an holl lezennoù naturel, denel ha doueel (en o zouez lezennoù ar poell hag ar yezhadur), betek ma teuo an hinienn da vezañ un doare kreizenn digempouezioù ha diouerioù, barrek da bakañ krog war an holl re zievezh a dremen re dost. Adal ur vevenn 'zo, seurt hiniennoù ne c'hallont chom en o sav nemet dre genvezañs an diskibled tost, a servij a c'hourzhpouez<sup>20</sup> d'o drougoù : kontrol d'ar gevrinourion veur a zo an digenvez o stad naturel, Gurdjieff ne c'halle morse chom hep e damm lez muioch eget un nebeut munutennoù. Hag an diskibled tost, d'o zro, o deus ezhomm a c'hourzhpouezioù ivez ; kompren a reer neuze gant peseurt tizh sebezus e vez lonket ha kollet diskibled nevez gant ar skarennoù giz Gurdjieff ; en degouezhioù gwashañ e teuont da vezañ argollus evit ar gevredigezh a-bezh en-dro dezho (kv. degouezh Rajneesh).

An argerzhad-asotaat a ya en-dro mui pe vui evel ar "fiñverezh peurbadel" displeget e eilvet rannbennad levr Gurdjieff *Dezrevelloù Belzebud d'e vab-bihan* : diazezet war al lezenn "Pep tra a gouezh" (anvet "lezenn ar c'houezh" gantañ), a-walc'h eo e pep live "lemel kuit ar gwarezadennoù bihan en traoñ" evit ma

<sup>18</sup> Kelanwel : *autopsie*.

<sup>19</sup> Dilizaduster : *incorruptibilité*.

<sup>20</sup> Gourzhpouez : *contrepois*

<sup>17</sup> Kemparzhted : *symétrie*.



## Feur-emglev Gwenrann e 1365

En emgann an Alre<sup>24</sup> e varvas difennour Janed Benteür, Charlez Bleaz<sup>25</sup>, d'an 29 a viz Gwengolo 1364. Ne chome mui kalz a nerzhioù gouest da dalañ outañ. Dija e rae anezhañ e-unan « Yann IV ». Neuze en em droas ouzh Charlez V, roue Frañs, hag e kinnigas dezhañ, gant ma vefe anavezet evel Dug Breizh, da ober al le a wazoniezh dezhañ. Kinnig a reas ivez dic'haouiñ Janed Benteür.

Divi e oa Breizh gant ar brezel hir-se. Ar Saozon o devoa bet aotre gant o roue da breizata war zigarez sikour Yann IV !... Dre-se, ne voe ket pell oc'h anavezout da Zug trec'hour emgann an Alre, a-benn kaout peoc'h a-benn ar fin. O welout penaos e oa troet an traoù, ne zaleas ket roue bro-C'hall da dreñ e chupenn ha da zilezel Janed Benteür, a ziskoueze ivez bezañ prest da gevraouiñ. E Gwenrann an hini eo e voe kroget da vreutaat, « *ul lec'h a voe dibabet en abeg d'ar C'horaiz, a-benn kavout pesked aes a-walc'h* ». Ar Marichal a vBoucicault hag Arc'heskob Reims a rene an traoù en anv roue Bro-C'hall. Derc'hent deiz Pask e voe sinet ar feur-emglev e 1365, ha kaougantet e voe e miz Mae gant Charlez V. Hervez ar feur-emglev-se ez anavezete Janed Benteür hec'h eontr Yann Vonforzh ent gwir evit he Zug, ha Yann IV a ranke ober e le en anv e zugelezh d'ar roue. Neuze e c'helle Janed mirout he glad-dalc'h bras a vro-Benteür (ur bemvedenn eus Breizh) hep ober he le d'an Dug, met lavaret e oa e ranko hec'h heritourion henn ober diwezhatoc'h. Kontelezh Limoges a oa dezhi ivez, hag e ranke an dug talañ dezhi ul leve-bevañ a zek mil lur.

Ur c'hraf all a-bouez a zo er feur-emglev rak talvezout a raio diwezhatoc'h : merket e oa ez afe ar gurunenn hiviziken hepken a waz da waz, pared hepken, plac'h ebet. Met, e kenkaz ez afe da hesk pared Tiegezh Monforzh, neuze, daoust pegen dislararus eo e-keñver pezh a zo bet meneget a-raok, ez afe memestra kurunenn an duced da heritourion tiegezh Penteur... Diwar dremen, lavaromp diouzhtu ne ranke ket neuze Anna Vreizh hêrezhiñ, ur c'hantved war lerc'h, an dugelezh eus he zad !

D'an 13 a viz kerzu 1366 e reas Yann IV ul le a wazoniezh-stag d'ar roue evit e gontelezh a Vonforzh-l'Amaury, e-kichen Pariz, hogen, evit Breizh, e voe ul le a wazoniezh eeun hepken, rak, war ziviz Stadoù

<sup>24</sup> Ul levr 110 pajennad a zo bet moulet gant Hor Yezh e 1988, "Emgann Alre", ur barzhoneg hir bet skrivet gant Frañsez-Vari Klec'h. Kavout a reer ivez el levr-se un danevell o tennañ da emgann Alre gant La Borderie (Istor Breizh) ha bet lakaet e brezhoneg gant Roparz Hemon.

<sup>25</sup> En 1351 e oa aet skuih ar Saozon gant ar brezel. Dibrizoniañ a rejont Charlez Bleaz eus Toullbac'h Londrez evit ma tistrofe "d'e Vammvro a Vreizh" gant enorioù hag an titl a Zug, war an diviz ma timezfe e vab henañ, pa vo en oad da zimeziñ, gant unan eus merc'hed Roue Bro-Saoz.

Breizh, ec'h implijas ar roue a lavarenn voas : « evel m'o deus graet va diaraogerion henn gran deoc'h », emezañ. Lorbet ar roue hag e lez pa gave dezho e vefe bet ul le a wazoniezh-stag hervez divizoù feur-emglev Gwenrann !

## Hêrezh Frañsez II

Evel m'hon eus meneget uheloc'hik, o vezañ ma ne oa mab ebet gant Frañsez II, e ranked lakaat feur-emglev Gwenrann da dalvezout. Loeiz XI a gavas an dro da brenañ he gwirioù war an dugelezh digant Nicole Bleaz, pennhêrez tiegezh Penteur. Diwar-se, ne zaleas ket Frañsez II da lakaat Stadoù Breizh da zegas ur c'hemm da lezenn hêrezh an Dugelezh, ar pezh a voe graet d'an 2 a viz c'hwevrer 1486. Er skrid-se e lenner e c'hello an div Briñsez « *derc'hel, perc'hennañ ha kerziñ* » dugelezh Breizh.

Abalamour da se, pa varvas Frañsez II e miz here 1488, ne voe diaester ebet evit ar Vretoned : ar briñsez Anna a zeue da vezañ an Dugez Anna. Met evit ar roue, e oa ret lakaat ar feur-emglev da dalvezout.

Bezeta pe vezeta e ouzomp ne voe ket pell Loeiz XII a Vro-C'hall evit lakaat nulañ e eured gant Janed a Vro-C'hall a-benn gellout dimeziñ gant Anna Vreizh, intañvez Charlez VIII ! N'edo ket ar rouaned c'hall war bouez un dislavar ouzhpenn....

## Piv eo pennhêr an titl a Zug Breizh hiziv an deiz ?

Gwall lu e c'hell seblantout seurt gouenn, p'eo steuziet hon dugelezh abaoe 500 vloaz. Dre guriusted 'm eus graet an enklask-se, m'henn anzav ! Diwar holl ar pezh am eus displeget uheloc'h, e c'heller lavarout e ranker lakaat da dalvezout evit an Dugelezh ar reolenn a vez lakaet da dalvezout tost e pep lec'h en Europa, nemet e Frañs : ar vibien hervez o oad eo a rank hêrezhiñ, ha pa ne vez ket a vibien ken, ez eo ar merc'hed a ra, hervez o oad ivez. Perak ?

- dre m'hon eus gwelet ez eo bet doujet d'ar reolenn-se a rummad da rummad abaoe an duced kentañ, war bouez un degouezh hepken : hini Hoel bet dianzavet gant Konan II e dad ;
- dre m'hon eus gwelet gwiriond gwirioù Janed Benteür ;
- dre maz eo gant Tiegezh Penteur an hini eo ez a an dugelezh pa n'eus mui gour ebet e Tiegezh Monforzh, hervez feur-emglev Gwenrann ;
- m'eo bet anavezeta Anna Vreizh da Zugez gant ar Stadoù, pezh a c'heller degemer mat-tre abalamour d'un degouezh diaes-tre ha dre sentidigezh ouzh an dug Frañsez II a oa o klask un diskoulm, n'heller ket evit keloù-se ober evel pa ne vefe ket a wiraouriezh war hêrezh an titl a zug Breizh.



Neb a glask a gav. Un dra bennak diantav. Setu eta al lignez adalek Janed Benteür :

Janed Benteür, dugez dre zerc'houezadur he zad Gwion a Vreizh, breur yaouer an Dug Yann III.

+ (dimezet gant) Charlez Bleaz, Dug hed-buhez e wreg, † 1384 ;

- diouto Yann Bleaz, kont Penteür † 1403 ;

- dioutañ Olier Bleaz, a voe lamet e gontelezh digantañ, † 1434 ;

Charlez Bleaz, e vreur † 1434 ;

- dioutañ Nicole Bleaz, lezanvet « a Vreizh »

+ Yann de Brosse, Marichal a vBoussac ;

- diouto Yann de Brosse, lezanvet « a Vreizh » ;

- dioutañ René de Brosse ;

- dioutañ Yann de Brosse dug Etampes Gouarnour

Breizh, † 1565, chomet divugel ;

- e c'hoar Charlotte, a zimezas gant François de Luxembourg, bezkont Martigues, Gouarnour Breizh ;

- diouto Charles de Luxembourg, divugel ;

- e vreur Sebastian, Gouarnour Breizh † 1569 ;

- dioutañ bugel ebet nemet ur verc'h : Marie de Luxembourg, a zimezas e 1575 gant Philippe-Emmanuel de Lorraine, dug Mercoeur, bezkont Martigues † 1598 ;

- diouto bugel ebet nemet ur verc'h : Françoise de Luxembourg, dugez Penteür, Etampes ha Mercoeur, a zimezas gant Sezar a Vendôme, mab bastard Herri IV, roue Navar ha Bro-C'hall ; Sezar a voe lakaet da C'houarnour Breizh hag e reas e seizh gwellañ a-benn bezañ dizalc'h, pe dost ;

- diouto ez eus bet tri bugel :

1. Louis, dug Mercoeur ha goude-se dug Vendôme, dimezet d'un nizez d'ar c'hardinal Mazarin ; daou vab o deus bet, Louis-Joseph ha Fulub, jeneraled o-daou, chomet divugel o-daou † 1712 ha 1714 ;
2. Elisabeth, a zimezas gant Charles de Savoie dug Nemours (gwelout izeloc'h) ;
3. François, dug Beaufort, haroz eus ar « Fronde », chomet dizimez ;

eus Elisabeth ha Charles de Savoie e voe div verc'h. An hini henañ, Marie-Jeanne de Savoie-Nemours (1644 -1724), a zimezas gant Carlo-Emmanuele II Dug Savoie ; hemañ, souezhus eo, a zo diskennad Anna Vreizh hervez an hevelep reolenn hêrezhiñ <sup>26</sup> ;

<sup>26</sup> Anna Vreizh he devoe Glaoda, he devoe Frañsez III Delfin a Vro-C'hall hag an diwezhañ dug Breizh savet war e dron, goude-

- diouto e voe Vittorio-Amedeo II Dug Savoie ha Roue Sardagn ;

- dioutañ e voe Carlo-Emmanuelle III, de Savoie, Roue Sardagn ;

- dioutañ e voe Vittorio-Amadeo III de Savoie, Roue Sardagn ;

- dioutañ e voe Carlo-Emmanuele IV de Savoie, Roue Sardagn, divugel ; hêrezhiñ a reas hemañ eus gwirioù war an titloù a roue war Bro-Saoz, Bro-Iwerzhon ha Bro-Skos, hervez pezh a reer ar « Jakobited », da lavarout eo diskennidi ar roue Jakez II Stuart, ur roue kanttroet d'ar gatologiezh hag a oa bet lamet kuit diwar e dron e gaou gant sikour 3000 huguenod e 1688 ;

e vreur a hêrezhas neuze : Vittorio-Emmanuele de Savoie, Roue Sardagn ...

e fin a gont en em gaver gant Franz Von Wittelsbach, Priñs Bavaria, bet ganet e 1933.

An den-mañ, mab-kuñv penn-hêr d'ar Roue diwezhañ a vBavaria, Ludwig III betek 1918. Penn-hêr lignez teir bro geltiek ez eo ivez eta : Bro-Skos, Bro-Iwerzhon, ha Breizh, hag hini Bro-Saoz ivez war ar marc'had ! Skrivet eo bet nevez 'zo eus dezhañ, ha respontet en deus hegarat « *no coment* ».

En em gavet omp e penn un tennad hir a hent : spi am eus ez oc'h bet plijet gant an ergerzhadenn. Dugelezh Vreizh n'eus ken anezhi, hag ar penn-hêr anezhi ne raio netra evidomp. Ken buan all en dije gellet sevel e vouezh a-du ganimp. Franz eo e anv, ha n'eo ket Arzhur. Ma !

## Tepod Gwilhmod

se ez eus e vreur Herri II a Frañs, goude-se e vab Frañsez II a Frañs, ha breudeur hemañ, Charlez IX hag Herri III, divugel int bet o-zri met ur c'hoar henañ o doa, Elisabeth a vro-C'hall, bet dimezet da Fulub II a Vro-Spagn, o deus bet div verc'h. Fulub II a arc'has gwirioù e verc'h henañ Isabella, war an titl a zugez a Vreizh, sikouret gant itrikerezh Sezar Vendôme, hon eus bet tro da gomz diwar e benn hag a oa Gouarnour Breizh. N'he deus bet bugel ebet. He c'hoar Catarina a zimezas gant Charles-Emmanuel I-añ, Dug Savoie ; hemañ en devoe Carlo-Emmanuele II, a zimezas gant Elisabeth de Vendôme, pennhêrez Janed Penteür... Kement-se holl a c'heller da adkavout dre ar Genrouedad, war Wikipedia pergen.

## Koulz ar c'hastrilhez, gant Herve Ar Gall

E dibenn 2008 e oa bet moulet ar romant-se gant Al Liamm. Gant plijadur em eus kroget d'e lenn evit daou abeg : istor eo, hag e Breizh eo e tremen. Ouzhpenn-se e c'hoarvez an traoù da goulz an dispac'h Gall, ur prantad hollbouezus e istor ar Vro hag e hini va familh.

Anv a zo da skouer eus Pêr Gwilhmod, va anv-familh. Gwilhamod el levr, n'ouzon ket perak. Daoust ma n'eo ket prouet mat va c'herentiezh gant "Roue Begnen" ez eus em c'herz un daolenn vras eus Pêr Gwilhmod "Roue Begnen" bet treset gant Théodore Busnel e 1901, war c'houlenn va zad-kuñv d'ur mare ma oa

kalet ar stourm e Breizh etre an tu "Gwenn" hag "ar Re Ruz". Ha, na petra 'ta, ez implijas Busnel poltred va zad-kuñv da lakaat un dremm da "Roue Begnen" ! Anat eo n'eo ket estren an daolenn-se ouzh va emouestladur e uhelvennad " Feiz ha Breizh ".

Ouzhpenn-se ez eus anv el levr eus ar Markiz Artus de Bonchamps, Penn-Jeneral vandeard Arme katolik ar roue. Diskenn a ran eus e hanter c'hoar Emilie de Bonchamps, a zimezas un nebeud devezhioù war-lerc'h tremenvan he breur gant unan eus e letananted, Charles Goguet de la Salmonière, dres da vare "an droiad d'ar Gwalarn". Setu aze perak ivez e oa "Artus" kentanv va zad kozh... ur c'hentanv iskis a zo bet roet a-rummad da rummad em familh dre ar merc'hed (va mamm-guñv a oa Blanche Marie Goguet de la Salmonière), da zerc'hel bev en hon eñvor a familh prantad reuziek an dispac'h Gall, seul-vui ma timeze tud va familh kenetrezo e metou diskennidi eus ar chouanerezh.

Daoust maz eus taolennadurioù hir-mat ha traou adlavaret meur a wech en oberenn-se ez eo kaset mat al lenner da heul penn-tudennoù al levr, Kaourintin Madeg ha Pêr Mengi. Met o vezañ m'eo an div benntudenn-mañ krenn a-enep ar relijion ez eo bet aes d'an aozer kunujenniñ a dro-jouis ar relijion gristen adalek ar bajenn 63 : "Pennoù touz" evit "Menech'h" « kozh kredennour ac'hanout », « Mil mallozh d'o doue ! » , p. 83 « ar beleg Ferré-se 'zo ur roueelour daonet », « ar Vandeaned hegreidik », p. 96 « kanaouennoù da lakaat soudarded Bonchamps da vont da gofes kercent ha bezañ o c'hlevet », p. 111 « bigoted bro an Alre », « Mallozh tou », p. 158 « Kadoudal, azeuler ha liper treid ar Jezusted », p ; 164 « Kaozioù ar vourc'hizien devot, va niz », p. 182 « liperien treid ha revrioù ar Pab hag ar veleien », p. 184 « Mallozh d'o doue », p. 186 « kalotined Kadoudal », p. 200 « antekrist » hag all, hag all... En abeg da se on bet displijet-tre gant al levr-se, a-benn ar fin, heuget memes, rak an div benn tudenn-se ne oant nemet digarezioù evit an aozer, rener lise Diwan war am eus klevet, da ober goap ouzh ar feiz kristen, skoazellet maz eo bet evit ar blijadur-vras-se gant Yvon Gourmelon, a zo ar " Pab " war dachenn ar yezh e embannadurioù Al Liamm evel a ouzer. En em c'houlenn a ran hepken peur e teuo un tamm furnez da dud ar rummad-se, a-du gant brizhdispac'h 68, un tammig koshoc'h egedon eta, bet desket er relijion gatolik p'edont bihan, ha n'o deus ket kac'het c'hoazh o amzer c'hrennard.

Displijet on bet ivez gant dezo an aozer da chom hep doujañ d'an Istor, pa laka ar Vretoned da sevel ur Republik. Ne gav ket din e vije bet den d'ar mare-hont evit empentiñ seurt mennad. Gwelloc'h e vefe bet dezhañ, a gav din, doujañ d'an Istor evel-m'emañ, ha klenkañ e istor-dezhañ e-barzh an Istor-se, gant an "I" bras, hep degas kemm ebet dezhi, hervez e faltazi. En abeg d'ar mank-se ne ouzer ket mui petra 'zo gwir en e levr ha petra n'eo ket. Heñveldra a c'hellfed lavarout siwazh, diwar-benn kalz a levrioù all pe a filmoù a

ziskouezer er skinwel. N'ouzer ket mui petra a zo gwir ha petra 'zo faos, e-keñver ar wirionez istorel.

Dodenn al levr enta, a laka ar Vretoned eus kostez Rostren da stourm evit sevel ur Republik e Breizh a drugarez d'an diaesterioù o devoa ar Re C'hlas da zerc'hel d'o galloud d'ar mare-se, en abeg d'ar roueelourion a seurt gant Gwilhmod, Bonchamps pe Kadoudal. Kavout a ra din n'eo ket bet klasket a-walc'h el levr reizhabegañ dibab ar skrivagner da lakaat e harozed da sevel ur Republik e Breizh. Komz a ra dreist-holl eus an eneberezh etre ar re baour hag ar re binvidik, ha « Bleidi ruz Rostrenn » a seblant din bezañ heñvel ouzh ar gomunisted. War zigarez sevel ur Republik e Breizh eta ez asant an aozer e vefe skuilhet gwad.

Tu a vefe bet da zisplegañ ar pezh a oa e gwirionez d'ar poent-se : an dispac'h he doa roet ar galloud d'ar vourc'hizion hogen brein e oa dija ar galloud dindan ar rouaned, pell a oa. Brein e oa dre ma klaske ar rouaned, abaoe Charlez V ha Fulub Kaer da vihanañ, lakaat an Iliz da sujañ dezho, ha n'eo ket ar c'hontrol. Rak ar c'hontrol a oa bet hag a zo bet diverket eus al levrioù istor : ur poent 'zo bet, ar Grenn-Amzer, e oa unvan a-walc'h Europa dindan aotrouniezh an Iliz Katolik. Desket e vez er skolioù e Frañs, re Ziwan en o zouez siwazh, e oa ar Grenn Amzer un amzer deñval, un amzervezh griz en abeg d'ar gernez, d'ar c'hleñvedoù, da aloubadegoù ar vuzulmaned ha ... da gevezerezh ar rouaned kenetrezo, hogen arabat eo disoñjal eo bet ivez amzervezh ar *Summa theologiae* gant Thomas Aquinas, hini savidigezh an ilizoù-meur, amzervezh menech'h sant Kolomba, Benead ha Bernez, amzervezh sant Erwan ha Charlez Bleaz... Ouzhpenn-se ez eo lec'hiet an Dispac'h gall en « amzervezh Arnevez », dres war-lerc'h an «Azginivelezh », hag ar «Sklerijennoù », amzervezhioù a ziskar eus ar gevredigezh e keñver feiz, divez, prederouriezh ivez d'am soñj, un amzer m'eo bet gwallhejet an Iliz, dres. Ne gaver ket a-walc'h el levr pegen birvidik e oa feiz ar Vandreiz hag ar Vretoned e-keñver hini ar C'hallaoued : ar Vretoned a oa a-ziforc'h c'hoazh diouzh ar C'hallaoued en abeg d'o gizioù ha d'o yezh e kornog ar vro, hag ivez, muioc'h c'hoazh en abeg d'o feiz birvidik, frouezh « misionoù Breizh » ar seitekvet kantved. Ne c'heller ket kompren ar mare-hont hep ober meneg eus se d'am soñj... E Begnen da skouer e oa an Aotrou Nourry<sup>27</sup> person ar barrez da vare Pêr Gwilhmod. Diazezer urzh Kermaria eo bet, ha bout ma klasked diskar e Breizh ar relijion gristen o kemer hon ilizoù d'ober marchosioù, ar beleg-se a savas un iliz-parrez nevez e-pad an dispac'h ! Lakaat a reer ivez war e anv kantikoù 'zo evel « Pe trouz war an Douar ». Ur gwir sant hon eus aze, war a hañval, ha dre-se e kompren gwelloc'h penaos e c'hellas Pêr Gwilhmod ober pezh a reas paz eo e c'her-stur « *Me a zo evit va ferson !* »...

<sup>27</sup> Lenn a c'heller studiadenn Erlannig : « Pierre Nourry, Recteur de Bignan, curé de la cathédrale de Vannes, un artiste et un écrivain de langue bretonne », 310 p. 1978

Seblantout a ra ivez "Savidigezh Republik Breizh" bezañ un uhelbal, an diskoulm d'an holl gudennoù. Santout a reer aze ar *politically correct*, hini an demokratelezh, na petra, a zo un doare da ren ur vro hag a zo douget d'ar Gorreoù abaoe pell 'zo gant ar Frank-Mañsonerezh, met a zo e gwirionez, re alies er pleustr, an doare faos ha ganas o deus kavet tud 'zo da lakaat kabestr war ar re all. An hanter eus an dud mui ur vouezh, o voustrañ war an hanterenn all. Daoust hag eñ ne oa ket Breizh hogos emren e 1788 a-drugarez da Breudoù Breizh ? Daoust hag- eñ n'hor boa ket tizhet e Breizh ur seurt roueelezh Bonreizhel er pleustr ? Da glask petra sevel ur republik ? Daou benntudenn al levr-se a gav nerzh d'en em gannañ a-enep d'ar Re C'hlas evit en em zialañ eus tremenvan o

zadoù. Hama ! N'eo ket un hent-seurt-se a zo erbedet gant an Aviel, nann !!!

Al levr a laka da soñjal, evel-just er pezh a reas hor mignoned a Iwerzhon p'o deus savet o republik. Hogen, just-a-walc'h, da boent an Dispac'h, n'eo ket ouzh roueelourion an hini eo e veze stourmet hogen ouzh Republikaned, mignoned Voltaire, Rousseau hag ar Sklêrijennoù, da lavarout eo ur gealiadurezh enebet-krenn ouzh stuzegezh kristen don hor bro. Bezañ republikan Brezhon a zo koulz ha disteurel gwirizioù plouezat-kristen hor bro, anavezout ar Stad vrezhon evel un Iliz nevez, a-benn ar fin.

## Tepod Gwilhmod

### Orin gwirion enkadenn ar c'hellid

Dilennet eo bet Scott Brown, ur republikan, evel senedour er sez bet dalc'het gant an demokrat Edward Kennedy – Doue d'e bardono – abaoe 1962 betek 2009 er Massachusetts, USA. Evel un taol kurun eo bet disoc'h an dilennadeg-se er Stadoù Unanet, ha da gentañ-penn evit ar prezidant Obama, dre ma kolle ar muiañniver ret dezhañ evit lakaat mouezhiañ e raklun kretadurezh-yec'hed. Perak an dianzav-se ? Bernard Cabannes er gelaouenn c'hallek *Monde & Vie*, niv. 822, 30 Genver 2010 a ro deomp e soñj war se, hag ivez e soñj war orin gwirion enkadenn ar c'hellid.

Raklun Obama da daosañ ar bankoù, a bare ouzh an efedoù kenderc'het gant o mesarveroù<sup>28</sup>, ha n'eo ket gant pennabegoù ar mesarveroù-se. Evit implij ur chemedenn skeudennek e c'hellfed lavarout e kase ar Prezidant ar vankerion, skoazellet gant arc'hant ar gevrozourion, da c'hoari a-nevez er "C'hazino", e-lec'h adlakaat da dalvezout lezenn enep-enkadenn 1933, ar Glass-Steagall Act, a verze ouzh ar bankoù-adnav da arvrokaat. Se eo a vije displijet da zilennerion ar Massachusetts, ha da galz Amerikaned all

Diskaret e voe al lezenn-se e 1999 gant ar Prezidant Clinton. Perak e lamm an aspled-mañ ? Evit aotren ar bankoù da ismoriñ ar bern kredouriezhoù diatoradus e oant bet rediet da reiñ d'an dud dre ul lezenn yoc'htruterek o tiazazañ ar "gwallziforc'herezh soliadek" e damani ar c'hred-prenañ tiez. Gant lezenn Carter 1977, bet kreñvaet gant Bill Clinton e 1995, e oa kendaonet da baeañ tellgospoù pounner nep bank en dije nac'het ober kred da dud ar minorelezhioù. Evel-se e voe gwerzhet gant kouraterion o devoa gouezet a-zoare korvoñ ar

<sup>28</sup> Mesarver : excès ;. Kevrozour : contribuable ;

saviad, milieroù a diez da dud n'o devoa ket an dollar kentañ evit paeañ, pep dollar o vezañ prestet gant ar bank.

Ur c'hresk spontus a voe war nevid an tier e-pad ur prantad mat, hogen, gant ar feurioù war gemm - araez kentañ d'ar bankoù d'en em dennañ -, e voe taolet buan d'ar straed ar re gentañ na c'hellent mui daskoriñ o amprestoù. Gwerzhet e veze o ziez gant ar bankoù, met digresket kalz en devoa priz an tiez, ha buan e komprenas ar bankoù pezh a oa o vont da c'hoarvezout : ne zeuent ket a-benn da adkavout an holl arc'hant o devoa prestet brokus, rediet ma oant bet gant lezenn Clinton.

Kavet e voe un diskoulm d'ar gudenn gant ar vankerion avat : beuziñ ar c'hredouriezhoù diatoradus, e-barzh aozadoù kellidel dialuskel<sup>29</sup> hag o gwerzhañ er bed a-bezh, met n'o devoa ket an aotre da ober se. Ober a rejont neuze seziz burev ar prezidant Clinton a oa e dibenn e leuriadeg hag a zouje, evit e strollad, heuliadoù e yoc'htruterezh. Kuzuliet gant Lawrence Summers (kuzulier kellidel a-vremañ Obama !!!) e tigoras dezho tachenn an arvrokaerezh, evit ma vefe adkavet ganto er Yalc'h an arc'hant kollet gant e lezenn yoc'htruterek. Setu penaos, digresk didec'hadus marc'had an tier, c'hwezet betek re, a oa o vont da servijout da zistigner d'un enkadenn kellid o vont d'en em ledañ er bed a-bezh.

**Yann MIKAEL**

<sup>29</sup> Aozadoù kellidel dialuskel : *produits financiers dynamiques* ; Bank-adnav : *banque de dépôt* ; Arvrokaat : *spéculer* ; Tellgosp : *amende* ; Arvrokaerezh : *spéculation* ; Kredouriezh Diatoradus : *créance irrécupérable* ; Yoc'htruterek : *démagogique* (trital ar yoc'h) ; Gwallziforc'herezh soliadek : *discrimination positive*.

### Galloud = Gwazerezh

« Tabut a oa savet etre an daouzek : Piw anezho a oa da vezañ sellet evel an hini brasañ » Lukaz 22, 24

En e stad kraï en deus an den ur c'hoant a vrasted, a

veurded. Anat eo, ez eus c'hoantoù a c'halloud en hon holl strolladoù. Lomañ<sup>30</sup> ez eus ur stourm dizehan evit ar galloud. Mestroniañ, aotrouniañ war ar speredoù ha war ar c'horfoù, setu ar pal. Siet gant ar pec'hed-orin e c'hell mab-den ober un arver fall eus e beadra hag eus e c'houiziegezh.

Spiswel e vez ar Bibl o vurutellañ roueed, tierned ha pennoù-bras da vezañ direizh ha skramer. Prestañ a reer gerioù-stur garv d'ar roue Salaun, evel hemañ : « *Bez' ez eo evit ober an droug ma vestroni an denion ar re all* » Ko 8-9. Pevar c'hantved kent Jezuz-Krist, e ouie ervat endeo an henamzeridi e oa riskloù gant ar galloud, da vezañ teoget gantañ. Kelennet e vez gant an Adlezenn « *Ra ne vo ket gant ar roue un niver bras a gezeg, ket un niver bras a wragez, ket un niver bras a arc'hant...* ».

Gouzout a reomp e c'hell ar galloud degas an dud d'an holl drougarveroù, mar n'eo ket hemañ strizhreolet. Bez' ez eo pezh a ginnige naer gozh paradoz an douar d'an denion : *bezañ evel doueed* » (Gn 3-5). Doueed c'halloudek, diharzoù, evel ma hunvre faltazi diskiant an denion. Pa soñjer « galloud » e soñjer gallusted, beziadusted da wezhiañ war rezid ar re all, barregezh da grennañ warnañ. Evel-se eo e soñj ar “bed”, da lavarout eo an nerzhioù a enep d'an Aviel.

Ur gwall wirvoud eo ma vez ar feulster, ar mac'homerezh, ar varbariezh – hini an naziouriezh, ar gomunouriezh, an islamouriezh – an tarwazerezh, an droukvarc'had, krignoù-bev ar galloud. Arabat deomp ankounac'haat ez eo bet ar galloud, hini Pontius Pilatus hag hini Kaïphas, en deus kaset Mab Doue betek ar Groaz. Retvezek eo ar galloud, hogen arvarus eo. Emouez eus an dra-se e oa Jezuz a anaveze ervat kalon an den. Bez' e lakaas en o stern en dro an ebestel, c'hoantus a staeloù en-dro d'ar « Roue ». « *Ar re a vez sellet outo evel pennoù pobloù a c'hourc'hemenn warno evel mistri, hag an uhelidi en o zouez a laka o galloud da bouezañ warno* » (Mark 10-42). « *Me avat, a zo en ho touez evel an hini o servijiñ* » (Lukaz 22-27)

<sup>30</sup> Lomañ : *ici-bas* ; Adlezenn : *Deutéronome* ; Gwezhiañ : *agir* ; Rezid : *liberté* ; Tarwazerezh : *corruption* ; Drouk-varc'had : *compromission* ; Retvezek : *nécessaire* ; Trinnet : *traité*.

Ne c'hell bezañ meizet ar galloud gant ar C'hrist nemet evel un emroidigezh e gwazerezh ar re all, ha damant evit mad an holl. N'eo ket deuet evit diazezañ ur galloud nevez. N'eo ket deuet evit ren hervez Herodez pe Kaezar. Disheñvel eo natur e Rouantelezh. Hogen ne vez ket komprenet gant e ziskibled o-unan ; gortoz a raent dioutañ galloudegezh ha trec'holid. Evel-just e komz al lizher d'ar Filipidi 2, 5-11 eus Jezuz « Aotrou », hogen roet e vez an titl-se d'an hini en em lez da vezañ trinnet evel livastred hag a varv truezus evel ur forbann. Deuet eo Doue betek ennomp evel ur servijer, evel ur sklav.

Ya ! Fellout a ra din un Doue, ma vez ret deomp en em stouiñ dirazañ. Ha ret eo en em stouiñ ! Hogen fellout a ra din un Doue a oar penndaoulinañ, ha ne fazian ket ; penndaoulinañ a ra gant ul lestrad dour evit gwalc'hiñ treid e ebestel. A dra-sur ez eo Mab muiañ-karet un Tad a zo hep mar ebet hollec'halloudek, hogen hollec'halloudek a garantez. Ha merzet hoc'h eus : paz en em guzhas Adam, war lerc'h e gouezhadenn, ar C'hrouer a oar pep tra, a wel pep tra, n'en devoa ket ezhomm da c'houlenn ouzh Adam pelec'h edo ; koulskoude e tilezas ar galloud-se.

Evit pezh a sell ouzh ar grouadelezh, e lavar ar Salm 8 en deus an den ur galloud a vestroniezh warni. Anat, e vez anv amañ eus ur mererezh fur. Evit pezh a sell ouzh an Iliz, ne fell ket dezhi chom er-maez eus an Istor hogen er-maez d'ar galloudoù. Hervez an Aviel e tle pep galloud, pep aotrouniezh en Iliz bezañ ur gwazerezh a youl-vat. An Iliz daoust ma c'houlenn start e renfe an urzh, n'eo ket galloudezh da gentañ-penn : ur vodadeg a baourkaezh pec'herion ez eo, a asant da ober hent a-gevret hag en em lez da vezañ salvet gant ar C'hrist.

Kejañ gant un Doue dizarmet a lam digant an den e holl armoù : fougaserezh, rogoni, emloc'h, feulster, evit mestroniañ war ar re all.

## Ar Bigouter

**Kañv** : Hor mignon Yann Talbot, beleg, a ro dimp da c'houzout eo marvet e vamm d'an oad a 96 vloaz, d'al Lun 18 a viz Genver. Lidet eo bet an obidoù d'ar Yaou 21 en iliz Brelevenez, ha beziet eo bet e bered ar Foarlec'h e Lannuon. Pedit Doue eviti. Ha da Yann e kasomp hor gourc'hemenoù a gengañv.

### Mererezh :

13 € eo ar skodenn emezellañ da EAT a ro ar gwir da resev *Kannadig Imbourc'h*. (15 € er-maez ar C'hwec'hkogn). Talet e vez e penn-kentañ ar bloaz (pemp kasadenn da vihanañ). Ar chekenn a zo da gas war anv EAT pe **Imbourc'h** da : E.A.T., c/o Yann MIKAEL 12 straed René Giraud 44130 BLAEN - Roll an niverennoù pe oberennoù n'int ket c'hoazh diviet a c'heller kaout o skrivañ pe war : <http://pagesperso-orange.fr/Kannadig/> (*Notit eo bet kemmet chomlec'h lec'hienn EAT-IMBOURC'H*)

### Skridaozerezh :

Ar pennadoù a zo da gas da : [jean-mariemichel@neuf.fr](mailto:jean-mariemichel@neuf.fr), pe dre ar Post da rener Kannadig Imbourc'h : Yann MIKAEL, 12, Straed René Giraud, 44130 BLAEN. Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re o deus



